

## KIS-552 – Al loen evel gouzrec'h

(GE – 03 09 97)

En notenn-mañ e karfen distreiñ war ur poent a Brederouriezh a'm eus bet tro da venegiñ c'hoazh e div notenn gent : penaos “dodiñ al loen evel gouzrec'h” (KIS-545, La-11, p. 285), “penaos anaout al loen evel gouzrec'h mar emleg ar gouzrec'h an emouezañ ? (KIS-550, id., p. 323). Ur poent a Brederouriezh ha, da gentañ, lies poent a Yezhouriezh evel m'hon eus gallet stadañ e-kerz an div notenn-se.

Mat eo da gentañ brastresañ dehentadur ar preder a zo difourket gant keal al loen evel gouzrec'h.

### DANVEZ HA SPERED

Lezel a ran a-gostez amañ diaraogerioù aristotelek ha skolastek an daou dermen evit stagañ diouzhtu gant o ster kartekek pa emañ en orin dispakadur ar Brederouriezh vodern hag ar Ouezoniezh. Evel a ouzer, e kevenebe DESCARTES ar *res extensa* (bout war astenn, *pezh astennat*) hag ar *res cogitans* (bout o tezevout, *pezh dezevat*). Alese, dezevout diwar-benn ar pezh astennat, an danvez, a veze emell ar gouezoniour endra veze emell ar prederour dezevout diwar-benn ar pezh dezevat, ar spered.

War daou gentread e tiazezas ar Ouezoniezh : a) anavezadusted an danvez ennañ e unan, *en-un*, an anaout gouiziel o vezañ disoc'h an disparti etre an elfennoù o tont eus an traoù anavezet hag an elfennoù o tont eus spered an anavezour ; *pennaenn an ergorelezh* eo, an dra anavezet ent ouiziel o vezañ an un *ergorenn* evit kement spered 'zo, dezhi gwirionez enta ; b) displegadusted an danvez : ennañ ne c'hoarvez netra hep ma ve un arbenn ; *pennaenn an arbennelezh* eo (sl. KIS-516, La-11, pp. 52 hh.)

Bep ma tispake Gouezoniezh ha Prederouriezh avat e teuas diaesterioù bras ouzh bras da skoilhañ dedalvezadur reizhiad daouelour DESCARTES, o lakaat brall en eil kentread hag en egile.

An diaester kentañ a c'haller dezgeriañ dre an aters : Penaos dezevout an dezevoud ? Keit ma 'z eus anv d'ober meiz war an danvez alvezel, ez arloer didenn pennaennoù an ergorelezh hag an arbennelezh — betek ur par da nebeutañ. Trevell all eo avat o lakaat da c'hoari war an dezevoud e unan, mab den, a zo danvez ivez, evitañ da vezañ spered war un dro. Aze emañ pistig an daouelouriezh a zifretas ar brederourion outañ e-doug tri c'hantved, pe dre glask saveteiñ an daouelouriezh koustet a gousto ha diskleriañ ez eo danvez ha spered n'eo ket *unan* met *unanet* e mab den — ha c'hwitañ war nep argeziad da lakaat a-wel ur gwri etre danvez ha spered, etre korf hag ene —, pe dre zigeriñ hentoù diflipout, an daou hent eizhañ o vezañ ober d'an danvez steuziñ er spered ha d'ar spered koazhañ en danvez. An hent-mañ diwezhañ e voe hini ar Ouezoniezh pa gemeras da gefridi astenn d'ar werc'helezh a-bezh an hentennoù a rae berzh e displegadur an alvez, hogen ne dizhas ket kabestrañ mab den dindan bennaennoù an ergorelezh hag an arbennelezh (sl. KIS-516, id., p. 54).

Digant ur prederour e tlee dont an taol a zeraouas diskogellañ ar meizadur daouelour. Endra lakae ar Ouezoniezh e spir ezvevennañ eus hon anaout kement nad eo ket ergorel, e tiskouezas KANT ez eo an ergorelezh he unan ur c'henderc'h eus hon arc'hwel anaout : ne anavezomp ket an traoù enno o unan, *en-un*, met desteriet bepred gant hon meiz pe, evit ober gant kevatal rik ar *Verstand* kantek, hon *ervredañ* (sl. KIS-506, La-10, pp. 439-440). Hervez Kant, kantouezañ (Al. *Erfahrung*, Gl. *expérience*) ned eo ket enskrivañ ar bed diavaez war un daolenn werc'h. Div rummenn ergrafoù (Al. *Begriffe*, Gl. *concepts*) a ya d'ober hon ervredañ : 1° an ergrafoù pur (Al. *reine Begriffe*) pe a-gentouez (Al. Gl. *a priori*), anezho kementad, doaread, diazalc'h, h.a., na zeuont ket eus ar c'hantouezañ ; 2° an ergrafoù a-zianouez (Al. Gl. *a posteriori*) pe kantouezat (Al. *empirische*, Gl. *empiriques*), anezho kealiou hollek o tisoc'h eus ar c'hantouezañ, da skouer : ar stered, ar c'harbed, h.a. Ar c'hantouezañ a ampleg an ergrafoù a-gentouez a ro furm dezhañ, ken n'eo ar Ouezoniezh evit pourchas estreget un derc'hennadur desteriad eus an traoù.

Kejañ a reomp gant ar gudenn a Yezhouriezh hon eus pletet ganti c'hoazh (KIS-550, La-11, pp. 316 hh., pp. 322-323 pergen). Savelet e vez an ergorelezh dre ezvevennañ kement a zo dangorel en anaout : dre buraat ar c'hantouezañ diouzh pep kantaezañ — hemañ o vezañ “broustenn” an dangorelezh e par an emouezañ. Pa ziskler Kant emañ ar c'hantouezañ e dalc'h furmoù *subjektiv* 'zo eus an anaout, e ve fazi bras reiñ Br. *dangorel* da gevatal da *subjektiv* ; ar *Subjekt* a zo anv anezhañ amañ ned eo ket an *dangorenn* a zle an *ergorer* diwall diouzh he delanvad, hogen ar *gouzrec'h*, an den evel anavezour an traoù hag o anavez, hervez Kant, diwar-bouez ar stellad ergrafoù a

vez en e biaoù *a-gentouez*, eleze kent gouzout mann eus an traoù. Rankout a reer lavarout enta : “Emañ ar c’hantouezañ e dalc’h furmoù *gouzrec’hel* ’zo eus an anaout”.

Diret edo an dud a skiant, er renk kentañ eus dalc’hiaded pennaennoù an ergorelezh hag an arbennelezh, da emober diouzh prederouriezh KANT.

*“Hemañ eo evit skiantoù an natur an heuliad da zezvarnerezh Kant : diagent, e c’hallent arvestiñ diseblant a-walc’h ouzh ar c’henniñv o kevenebiñ ar spered hag an danvez ; hiviziken ez emgavent sanket o unan e kalon ar c’henniñv. An dic’hallus ez eo eren ar speredel ouzh an danvezel, argraf hemañ a oa chomet betek eno e damant an deologourion hag ar brederourion, a stagas trumm da wiskañ un dremm nevez : an argraf ne oa mui gouzout penaos ez emren ur spered krouiñ e gwerc’helezh louet ar bed e-keñver an traoù — a c’halled ervat, evel den a skiant, studiañ evito o unan ; hiviziken edo, gant an divarrek ez eo spered an den engwezhiet en e imbourc’h da anaout an traoù evel m’emaint en-un, dizalc’h diouzh ar sell a daol an den warno ha diouzh e varnadoù desteriañ. En doare-se neoazh e saved diforc’hell evit ar wech kentañ en istor skiantoù an natur ar gudenn diazez stignet ganto diouzh savboent prederouriezh an natur, a c’haller dezgeriañ evel henn : petra, diwar sol an arnodoù a reomp en amgant hon erbaroù gouzriel, a c’hellomp haeriñ a-zivout an natur he unan, pa van houmañ bepred en diavaez eus seurt erbaroù ?”* (Thure von Uexküll<sup>1</sup>, pp. 89-90 en destenn alamanek orin, pp. 67-68 tr gl. in *É. P.*).

Thure von UEXKÜLL a zeskriv dastaol an ideologiezh daouelour ouzh degasadenn KANT : euvret e voe houmañ ouzh he falsañ, o tilec’hiañ eus tachenn an anaout da dachenn ar bout an disparti en doa merket ar prederour etre an div rummenn ergrafoù a-gentouez hag a-zianouez.

*“War-benn kemmirout ar meizadur orin eus un natur o revout en-un, eleze o c’hoarvezout eus ur rann danvezel hag ur rann speredel a-rakwez da nep desteriadur, e oa diziouerus piaouañ rummennoù dezevout ’zo en*

<sup>1</sup> Bevonior ha mezeg, Thure, ganet e 1908, a gendalc’h labourioù e dad Jakob von UEXKÜLL (1864-1944). An hini kentañ e voe hemañ o tiskleriañ e ranker, evit meizañ al loened, gwelout enno n’eo ket traoù met gouzrec’hioù. Krouiñ a reas keal an *Umwelt* ha diazezañ e 1925 e Hamburg an *Institut für Umweltforschung*. Tennet eo an arroud-mañ eus “Kritik der naturphilosophischen Voraussetzungen unserer Zeit und unserer Einstellung zum Teleologie-Problem”, chabistr IV eus *Der Mensch und die Natur. Grundzüge einer Naturphilosophie*, A. Francke, Bern & Leo Lehnen Verlag, München 1953, pp. 89-90. Trugarez a zlean da Universitäts-Bibliothek Erlangen a brestas din al levr dre hantererezh GÖTTE INSTITUT Paris hag Alan E. AR BERR. (Kv. ivez tr. gl. in *Études phénoménologiques* 23-24, 1996).

*araez da azbagoliañ mennoz un anaout an natur en-un. E sell da se e klaskad korvo gant ergrafoù kantekek an amparañ hag an arouleviañ a oa houmañ o zalvoudegezh orin : pennaennoù amparañ (« konstitutive » Prinzipien) a rae KANT eus rummennoù an ervredañ o savelañ ent ergorel [a-zianouez enta] anien un dra dre berzh ma tennont da ergorennoù ar c'hantouezañ, ha pennaennoù arouleviañ (« regulative » Prinzipien) ar rummennoù o ren war an devezout e unan hep daveñ d'ur c'hantouezañ gallus [a-gentouez enta] » (id., p. 90-91 t. al., p. 68 tr. gl.).*

Ar pennaennoù amparañ a voe intentet evel rummennoù ar *werc'helezh naturel* hag arveret evel modoù gavaelañ ergorel an traoù enno o unan, *en-un* ; kantouezañ a selled evel kenster da ziraec *bout* an traoù ; daruniet edo anadenn ha tra, fenomen ha noumen<sup>1</sup>. Evit ar pennaennoù *arouleviañ* pa sellent ouzh ar spered hepken n'o doa ket da welout gant ar *werc'helezh* ergorel hag anezho e raed rummennoù *pur* an ervredañ.

*“Adskoulmañ a raed gant ar meizadur kozh a zespize ar wirionez evel kevazasted an devezout diouzh an dra [adaequatio intellectus ad rem]. [...] Ne chome d'ober nemet devedañ ez eo an arbennelezh ur rummenn eus ar bout dre he ferzh amparañ, endra oa an davedelezh ur rummenn eus an ervredañ, dezhi un talvoud arouleviañ rik ” (id., p. 91 t. al., p. 69 tr. gl.).*

Hevelep prederouriezh daouelour ampleg er Ouezoniezh, mar tizhe skoeviñ an dezvarnerezh kantekek, a voe koulskoude lakaet en arvar gant dedroadur ar Ouezoniezh he unan.

*“1. Abaoe grez KANT ez eo bet peurdreuzfurmet ar Fizik hag un arvez boniek eus an treuzfurmadur eo ar savlec'h en deus kemeret e-keñver rummenn an arbennelezh<sup>2</sup>. [...]”*

*Houmañ eo ar gudenn evit gwir : mar naou ned eo ket an arbennelezh ur rummenn eus ar bout er ster meneget uheloc'h, hogen ur rummenn o kaout kantrated digant ar c'hantouezañ betek ur par hepken — en degouezh betek bevennoù ar Meurfizik — e sav an aters diazez en-dro : a belec'h e tennomp an dezverk a ro dimp gwir da haeriñ hon eus dec'havaelet bout un dra diwar-bouez hon rummennoù, pegen dizalc'h bennak ma ve eñ en-un e-keñver ergrafoù gouzrec'hel hon ervredañ ?*

<sup>1</sup> KANT a gevenebe an *Noumenon* ouzh ar *Phänomen(on)*, eleze ar *werc'helezh* evel m'emañ enni he unan, “ergorenn un nadiñ meizel nad eo ket hon hini e gwir, na c'hellomp ket zoken intent ar c'hallusted anezhañ”, ouzh ar *werc'helezh* oc'h anadiñ dre ar c'hantouezañ (sl. KIS-506, La-10, XI B, p. 442).

<sup>2</sup> Sl. an arnod amzaelañ *Pennaennoù kentañ* ar Brederouriezh klasel, KIS-516, La-11, pp. 51-64, *Pennaenn an arbennelezh* pergen, pp. 52-53.

*Diganreizh e naou enta diforc'hiñ er furm-se rummennoù ar bout ha rummennoù an ergrafañ ha rankout a reer distreiñ war ar ster dik o deus an ergrafoù amparañ hag arouleviañ. Un dra zo asur a bep hent : n'eur ket aotreet ken d'ober anezho spontailhoù evit dizarbenn an dezvarnadoù diaezus graet ouzh ur meizadur pe unan all eus an natur.*

2. Ouzhpenn ar Fizik zo bet treuzfurmet abaoe amzer KANT. Ar Vevoniezh ivez he deus emdroet. Lavarout a c'haller zoken ez eo er prantad-se ez eus diwanet ur Vevoniezh dellezek eus an anv. A bouez dibar evit hon prepoz eo ar rann imbours'h eus ar Vevoniezh arnevez akedet da ziskouez e vez pep bev o vevañ en ur bed amparet diwar-bouez endalc'hedoù e gedvout (Wahrnehmungsinhalten)<sup>1</sup>. Diforc'h eo enta bed pep spesad hervez ar skiantennoù hag ar modoù realañ a zo en e gerz diouzh ar bedoù e piaou d'ar spesadoù all. Divar eo enta e vez al loened o vevañ e-barzh bedoù anadennel (Erscheinungswelten) piaouel dezho. Gant seurt bedoù anadennel piaouel d'al loened, en doa J. von UEXKÜLL anvet amvedoù (Umwelten), emañ desavelet an amveziadoù diziouerus d'o dreistbevañ. Dre se ez eus anezho hep mar ebet tammoù natur, eus un natur « objektivel » (« objektiven » Natur) er feur ma c'haller he c'hevenebiñ ouzh buhezañ naturel « subjektivel » (« subjektiven » Naturerleben) *mab den* ” (id., pp. 92-93 t. al., p. 69-71 tr. gl.).

Etre daouankoù e lak Th. von UEXKÜLL *objektiven* ha *subjektiven*. Anat eo n'emeur mui eno er c'hevenebadur etre “pezh a denn d'an traoù” ha “pezh a denn d'ar spered”. Ken anat all ez eus eus an daouad “danvez” ha “spered” un tun eus ar gouzout hepken, e nep tro solwezioù gwerc'hel. Spletus e vez an tun keit ma chomer gant an erbar dinoiñ ar savelegezh : da amparañ an alvez ez emzalc'h an den evel ur spered dizanvez a-dal d'un danvez dispered. Digantrat ez a avat pa vez anv eus an den ha kenkoulz all — ar Vevoniezh en diskouez — eus ar bev. Naouiñ a ra ar bev — hag an den — evel un diabarzh kevenebet ouzh un diavaez<sup>2</sup>, resisoc'h evel ur *gouzrec'h* e darempred gant ur *gourzhdrec'h*, un *amved*.

## GOUZREC'H HAG AMVED

Arlakadenn ar Vevoniezh “dellezek eus an anv” eo enta intent darempred an den gant ar bed evel un degouezh dibarek eus darempred ar bev gant e amved. Merkomp diouzhtu kemplezhded hentenn ar studi : mont a zen da loen oc'h ober eus hemañ un *alterum subjectum* hag a loen da zen dre savelañ unan hag unan daou stellad

<sup>1</sup> Sl. KIS-545, La-11, p. 288 ha kevarad diwezhañ an notenn-mañ.

<sup>2</sup> A-zivout kealioù an diabarzh hag an diavaez evel naouus d'ar bev, sl. KIS-540, La-11, p. 223. A-zivout keal ar *gourzhdrec'h*, sl. KIS-550, La-11, p. 323.

ketep a gealioù. Goude digej ar beziadoù bevedel diouzh an trevnadoù alvezel dre emzieubiñ diouzh blein kentañ ar brizhdaouad danvez-spered, emeur bremañ sternet ouzh ar poellad digej al loended diouzh an dended dre zispegañ diouzh ar blein all — ent embregel savelañ kealioù kantrat kuit a nep ervannañ, na pa ve denervannañ pe loenervannañ : teurel pled da zerc'hel en o flas ken an den, ken al loen. Ar pleustr a ziskouez e c'haller *kevelebiñ* arvezioù ar gouzrec'h denel hag arvezioù ar gouzrec'h loenel — gant diwall ag o *hevelebiñ*. En imbourc'hioù kent hon eus bet tro da envel *eul* keveleb bevedel ar *ster* buhez. Kinniget 'm eus ober *gourzhdrec'h* eus keveleb bevedel an *ergorenn* amparet gant an den (sl. pajenn gent). Keal ar gevelepted koulskoude ne spir ket d'ober meiz war ar c'heñver etre dended ha loended. Eveshaet 'm eus da vezañ dikoc'h el linennoù diagent o kevenebiñ *bevedel* ha *buhez* kent eget *loenel* ha *denel* peogwir emañ *bevedel* ha *buhez* en erdal *denel*, pa'z eo ar vuhez un eskorad diwar ar beved, eskorad na gemer ket lec'h ar beved, en eheb, a ampleg e vezoud bezoud ar beved, e berr, a zo un dedaolad arskarek diwar ar beved. Al loen n'en devez ket perzh er vuhez — ac'hoel dioutañ e unan, mar lezomp a-gostez ar perzh en deus dre hanterezh an den, argraf ar *gedvuhez loen-den* o vezañ e-maez prepoz an notenn-mañ — an den avat en deus perzh leun er beved, ent kementadel zoken ez eo beved dreist-holl<sup>1</sup>. Ur skouer eus luniadoù ketep al loended hag an dended hon eus bet tro da venegiñ alies : ar gouzrec'h loenel a ampar gourzhdrec'hioù dre reiñ eul ; ar gouzrec'h denel a ampar ivez gourzhdrec'hioù dre reiñ eul — hag a eil lank, diwarbouez eilsammañ, a ampar ergorennoù dre reiñ ster.

E se, tamm ha tamm, e ser despizañ ar gevelepted etre loen ha den e tigejer div steudad kealioù kevelep : *beved* ha *buhez*, *eul* ha *ster*, h.a. En erv-mañ, penaos intent an arver a ra Thure von UEXKÜLL eus « *objektiv* » ha « *subjektiv* » en arroud usveneget ?

Emaomp dirak ur gudenn gemplezh ha d'he diskleriañ eo dav mont war an dachenn. Kemeromp skouer ur c'hazh o tostaat d'ul logodenn hag un den oc'h arvestiñ. Diwar ar sell ergorek eeunañ, an hini a daoler ouzh an anadennoù alvezel, e teskrivfe an den daou gorf o fiñval, an eil o tostaat d'egile. Da veizañ fiñvoù ar c'hazh evel moned etrezek ur preizh, e rank an den kuitaat ar sell ergorek alvezel ha tremen, koulz lavarout, e-barzh sell ar c'hazh — anaout ar c'hazh evel gouzrec'h, evel *alterum*

---

<sup>1</sup> Evit respont d'an aters dezgeriet e derou an notenn-mañ : an darempred “drec'hiñ” etre gouzrec'h ha gourzhdrec'h a zeraouas pell a-raok eskoridigezh an emouezañ en istor ar beved — er c'hevandarzh – ha nemedennek e chom atav an emouezañ. Diwar vont, merkomp kerentiez yezhel ha moarvat kealel *gouzrec'h*, *gourzhdrec'h* gant *pazenn an drec'h* lakane.

*subjectum* — arverañ un hentenn heñvel ouzh an hini kentradet gant DILTHEY hag anvet gant Max WEBER *deutendes Verstehen* (*kevnaderezh desteriañ*)<sup>1</sup>. Ar c'hazh o vezañ kevnadet evel gouzrec'h, e vo desteriet e emzalc'h evel reiñ *eul* preizh d'al logodenn hag e fiñvoù evel realoù a-geflen gant e amved. Merkomp mat an daou lankad : 1° Dre ar c'hevnañ e teu ar gouzrec'h denel da *hevelebiñ* (e ster ar Bredelfennerezh<sup>2</sup>) ouzh ar gouzrec'h loenel, eleze da zioueriñ perzhioù digen an dended ha da emgantañ e perzhioù boutin etre dended ha loended. 2° Dre an desteriañ e kemer an arseller denel da ergorenn ar gouzrec'h loenhevelep ez eo a-du-rall hag e te zrann e berzhioù e-keñver ar perzhioù denel kevelep : reiñ eul a-dal da reiñ ster, amparañ *gourzhdrec'hioù* a-dal da amparañ *ergorennoù*, kedvout a-dal da gantvout<sup>3</sup>, h.a.

Hag ar c'hammedoù denesaat emaoomp o paouez ober a aesay dimp intent frazenn Thure von UEXKÜLL : “[Eus an amvedoù] ez eus tammoù natur, eus un natur « *objektiv* » er feur ma c'haller he c'hevenebiñ ouzh buhezañ naturel « *subjektiv* » mab den”? Amved al loen zo un tamm alvez hiniennaet dre berzh an *eul* a ro dezhañ al loen. Ennañ e c'hoarvez dre berzh realezh al loen treuzfurmadurioù alvezel, hogen d'ober meiz warno ne spir ket saveleñoù an alvez, rekouriñ d'an *eul* a ranker ouzhpenn. *Gourzhdrec'hioù* int evit al loen ; an arseller, en tu all d'o anaout evel anadennoù alvezel ergorel, a lenn warno an *eul* roet dezho gant al loen e ser o lenn evel ster (ouzh o *desteriañ*). E se un teskad darvoudoù alvezel, *kedet*<sup>1</sup> hiniendded dezhañ gant al loen, a ya d'ober pezh a c'halv Thure von UEXKÜLL “un tamm natur” lavaret gantañ « *objektiv* » — etre daouankoù pa biao un ergorelezh kemplezh, enni daou ampar : un ergorelezh alvezel displegadus hag un ergorelezh eulel desteriadus. Anavezomp n'eo ket nevez ar seurt ergorelezh liesampar : ar ger a skrivan zo dezhañ ivez ergorelezh alvezel evel huz, h.a. hag ergorelezh sterel evel ergorenn lavarel. Al loen a enskriv *eul* en alvez, lennet gantañ e ser realañ, lennet ganimp e ser desteriañ. Bremañ pa ra Thure von UEXKÜLL anv eus “buhezañ naturel « *subjektiv* » mab den”,

<sup>1</sup> Hentenn gevredadouriezh despizet evel-henn gant Max WEBER : “Kevnañ zo anaout stadoù diabarzh ar c'hraerion a-strew hag ar sterioù roet ganto [an euladoù enta] d'o greadoù kevredadel ; o vezañ ma'z eo ar c'hevnañ tra an emskiantoù hiniennel nemetken, e rank ar remañ desteriañ an euladoù hag an talvoudoù o blegn” (Max WEBER, in *Emsav* 59, Du 1971, p. 359).

<sup>2</sup> Sl. *Geriadur ar Bredelfennerezh*, Preder 1983, ¶¶ 561 hh.

<sup>3</sup> *Kantvout*, damgenster da *merzout*, o vezañ e par an emouezañ, e'm eus kinniget desellout ur c'heveleb dezhañ e par an anemouez ouzh e envel *kedvout*, sl. KIS-381, La-09, pp. 278 hh. & KIS-545, La-11, p. 288 ; sl. ivez er bajenn da heul.

<sup>1</sup> A-zivout ar *c'hediñ*, sl. KIS-501, La-10, pp. 397-398 & KIS-540, La-11, pp. 215 hh., 231.

e kredan kompren e komz eus ar c'hevniñ, meni *Einführung* o reiñ d'ar gouzrec'h denel an tu da haeziñ dre an diabarzh amved ar bevion all. Ken ma kredfen peurdreiñ : “eus un natur « *ergorel* » er feur ma c'haller he c'hevenebiñ ouzh buhezañ *kevnadel* an natur gant mab den”, en ur virout an daouankoù ouzh *ergorel* da verkañ kemplezhded, liesamparded ar c'heal.

Da glozañ an notenn, met n'eo ket an imbourc'h ! e tistroin war ur c'heal eus ar steudad loenel. A-gevelep da geal denel ar *merzhout* e'm eus kredet savlec'hiañ keal loenel ar *c'hedvout*<sup>2</sup> — e lec'h all (KIS-545, La-11, p. 288) e tisklerian abegoù lugnidigezh an termen. E se, da zigej ar c'heal ez on aet dre un hent diavaez : leuniañ ur c'hombod en ur steudad, ha nac'hek : ezvevennañ pezh na c'hell ket bezañ mod anaout al loen : *naouaat* e doare ar robotoù ne ra ket — ar re-mañ a intenter diwar-bouez saveleñoù endra veizer monedoù al loen diwar-bouez an eul a ro d'an amved a ampar —, *merzhout* (*kantvout*, seul gent a se *argantvout*) ne ra ket kennebeut dre an un arbenn ma ne biau ket an daou droad all eus an trebez denel, *lavar* hag *ober*. Chom a ra da zigeriñ un hent diabarzh ha yaek — a rzh gant ar c'hevniñ desteriañ pe an dianderc'hañ freudek ?

---

<sup>2</sup> Merkomp e ra ingal en div steudad ar galleg gant *percevoir*, an alamaneg gant *wahrnehmen*. Sl. p. 332 a-zioc'h.